

LIZHER KELAOUÏÑ

Lettre d'informations



DISKOUEZADEG BETEK AN 28 A VIZ MEURZH 2025

EXPOSITION JUSQU'AU 28 MARS 2025

LÉVÉNÈS DE CLEDEN-POHER

War hent Kledenn-Poc'hêr : gwiskamantoù Breizh
Sur la route de Cléden-Poher : costumes de Bretagne

EUS AR 7 A VIZ GENVER D'AN 28 A VIZ MEURZH 2025
DU 7 JANVIER AU 28 MARS 2025

DISKOUEZADEG LUC'HSKEUDENNOÙ **EXPOSITION PHOTOGRAPHIES**



LÉVÉNÈS DE CLEDEN-POHER

War hent Kledenn-Poc'hêr : gwiskamantoù Breizh
Sur la route de Cléden-Poher : costumes de Bretagne

DIGOUST

GRATUIT

KREIZENN SEVENADUREL BREIZHEK
CENTRE CULTUREL BRETON
YEZHOU HA SEVENADUR

12 BALL AN ANJEVINIER - SAINT-ERVLAN
12 AVENUE DE L'ANGEVINIERE - SAINT-HERBLAIN
TRAM 3 SILLON DE BRETAGNE - BUS 50 & 54 ANJEVINIERE



Renseignements / titouroù
07 82 70 15 14 - yezhou@yhs.bzh
www.yezhouhassevenadur.bzh

Berzh bras a ra an diskouezadeg ! Laouen omp.

Ma n'ho peus ket gweladennet an diskouezadeg c'hoazh na ober anaoudegezh gant labour luc'hskeudenniñ Levenes de Cleden-Poher pe ma fell deoc'h dont en-dro e vo staliet an diskouezadeg e Yezhoù ha Sevenadur betek an 28 a viz Meurzh.

Ha m'ho peus c'hoant da c'houzout hiroc'h e vo an arzour en hor c'hreizenn d'an 20 a viz C'hwevrer a-hed an devezh.

L'exposition rencontre un grand succès et nous en sommes ravis.

Si vous n'avez pas encore découvert le travail photographique de Lévènes de Cleden-Poher ou si vous souhaitez revenir, l'exposition sera dans notre Centre Culturel jusqu'au 28 mars.

Et si vous avez envie d'en savoir encore plus, l'artiste sera présent toute la journée du 20 février.



Evit gouzout hiroc'h diwar an arzour
Pour en savoir plus sur l'artiste photographe

Renseignements au 07.82.70.15.14 / yezhou@yhs.bzh

DARVOUDOÙ / ÉVÈNEMENTS



MIZ MEURZH, MIZVEZH AR BREZHONEG MOIS DE MARS, MOIS DU BRETON

Bep bloaz abaoe 9 bloaz e vez aozet e miz Meurzh e 5 departamant Breizh Mizvezh ar Brezhoneg. Abadennoù e-leizh a vez aozet a-hed ar miz evit luskañ ha talvoudekaat ar brezhoneg.

Deraouad, gant ul live brav, etre daou pe kurius hepken oc'h ? Fellout a ra deoc'h gouzout hiroc'h, kregiñ da zeskiñ, addeskiñ goude un nebeud bloavezhioù ehan pe pleustriñ e-maez framm klasel ? Tout an dud a gavo ar pezh emaint o klask e-pad Mizvezh ar Brezhoneg.

Er bloaz-mañ e Liger-Atlantel vo ganimp c'hoariva, un abadenn radio war-eeun, ur sonadeg brezhoneg/kabil, prezegennoù, lennadenenn evit bugale, atalieroù keginañ ha gwriat, un nozvezh c'hoarioù video hag evit ar wech kentañ, un opera e brezhoneg mar-plij ! Evit an holl vlazioù hag an holl liveoù !

Au mois de mars, tous les ans depuis maintenant 9 ans, est organisé dans les 5 départements de Bretagne, Mizvezh ar Brezhoneg, le Mois du Breton. De nombreux événements se déroulent tout au long du mois pour promouvoir et valoriser la langue bretonne.

Que vous soyez débutant, intermédiaire, confirmé ou simplement curieux, que vous souhaitiez vous renseigner, commencer à apprendre, reprendre après quelques années de pause, approfondir,

pratiquer hors du cadre classique de l'apprentissage, vous trouverez ce que vous cherchez pendant Mizvezh ar Brezhoneg.

Cette année en Loire-Atlantique, nous aurons du théâtre, une émission de radio en direct, un concert mêlant langue bretonne et musique kabyle, des conférences, des lectures pour les enfants, des ateliers de cuisine et de couture, une soirée jeux vidéo, et même, première mondiale, un opéra e brezhoneg mar-plij ! Pour tous les goûts et tous les niveaux !

Brezhoneg, yezh bev ! Brezhoneg, yezh a -vremañ !
Le breton, langue vivante ! Le breton, langue d'aujourd'hui !

Evit gouzout hiroc'h / Pour en savoir plus

D'ar Sadorn 1añ - 3e-5e noz / Skol Diwan Sant-Nazer : Atalier KROCHEDIÑ e brezhoneg

Atalier evit krochediñ ha deskiñ ar geriaoueg e brezhoneg. Bep hini a zegas e dafar.

D'ar Sadorn 1añ - 6e noz / Opera Graslin Naoned : OPERA “Tornaodoù antronoz”

Opera gant Jean Lacomerie & Jean-Charles Richard e galleg, e saozneg hag e brezhoneg / ustitlet e galleg.

D'ar Meurzh 4 - 8e noz / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : GOULOÙ ZO : Istor ar brezhoneg e Liger-Atlantel

Prezegenn e brezhoneg gant Anton Chatelier ha Visant Roue / jubennet e galleg.

D'ar Merc'her 5 - 10e-11e vintin / Mediaoueg Gwenrann : LENNADENN e brezhoneg evit bugale etre 2 ha 6 vloaz

Lennadenn e brezhoneg. Betek 25 bugel hag ambrouger(ez).

D'ar Gwener 7 - 7e30 noz / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : ABADENN RADIO gant Radio Naoned

Abadenn e brezhoneg war-eeun evit lidañ devezh etrebroadel gwirioù ar merc'hed / jubennet e galleg.

D'ar Sadorn 8 - 10e-12e30 / Sant-Ervlan, Orvez, Naoned, Sant-Nazer, Gwenrann : Dorioù-digor SKOLIOÙ DIWAN

D'ar Sadorn 8 - 10e-12e30/ Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : Kinnig PATATI

Emvod foran da ginnig ar gevredigezh Patati, Kreizenn Dudi e brezhoneg.

D'ar Sadorn 8 - 3e-5e enderv / Skol Diwan Sant-Nazer : Atalier GWRIAT e brezhoneg

Atalier evit gwriat ha deskiñ ar geriaoueg e brezhoneg. Bep hini a zegas e dafar.

D'ar Meurzh 11 - 8e noz / Tavarn Game Over e Naoned : Fentlinenn 2 , nozvezh C'HORIOÙ VIDEO e brezhoneg

Un nozvezh c'hoari skignet war Twitch gant ur programm diouzh ar gwellañ a-bell...

D'ar Merc'her 12 - 8e noz / Kreizenn Sevenadurel St Pierre en An Turball : Atalier KAN e brezhoneg

D'ar Merc'her 12 - 8e noz / Tavarn Lutin de travers e Naoned : TAÑVA d'ar brezhoneg ha d'ar gallaoueg

Kejadenn evit ober anaoudegezh gant div yezh a Vro-Naoned en ur bakañ ur banne.

D'ar Gwener 14 - 10e vintin-4e enderv / Radio Naoned / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : Lid-digeriñ ar studio Enroll

D'ar Sadorn 15 - 2e goude merenn / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : EUROFONIK : Prezegenn war an enrolladennoù kozhañ e brezhoneg gant Tudi Crequer

Ur brezegenn e galleg evit tout an dud & war lec'h un eskemm etre brezhonegerien evit dielfennañ an enrolladennoù.

D'ar Sadorn 15 - 3e enderv / Sal ar Feunteun e Azereg : METAL NOZ

Sonadeg metal gant 8 strollad eus 5 departament Breizh. En o zouezh :Tanork.

D'ar Sul 16 - 5e noz / Sal ar Feunteun e Azereg : FEST DEIZ

Sonadeg gant Little Big Noz, Hent Douar, Trio Alcon, Kerent Trouzus. Dañs gant ar Strolladig An Tour Iliz.

D'ar Meurzh 18 - 8e noz / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : GOULOÙ ZO : Sonadeg Amelik & Mouss

D'ar Merc'her 19 - 3e enderv / Le Plan B en An Turball : Stal C'HOARIOÙ-TAOL e brezhoneg

D'ar Gwener 21añ - 8e noz / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : TROUZ ZO HA BISTRO

Evit seniñ, dañsal ha komz e brezhoneg.

D'ar Sadorn 22 - 9e vintin-11e15 / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : SONEREZH evit ar vugale

D'ar Sadorn 22 - 9e45 vintin / Skol Diwan e Sant-Nazer : STAJ Brezhoneg

D'ar Meurzh 25 - 8e noz / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : GOULOÙ ZO : Nozvezh vras e gallaoueg

D'ar Gwener 28 - 4e40-6e noz / Skolaj Diwan Liger-Atlantel e Sant-Ervlan : Doriou digor

D'ar Gwener 28 - 8e noz / Onyx e Sant-Ervlan : PEZH-C'HOARI "Hentoù gwenn"

C'hoariva e galleg, e brezhoneg hag e yezh ar sinoù.

D'ar Sadorn 29 - 3e enderv / Le Plan B en An Turball : Atelier KEGINAÑ e brezhoneg

D'ar Sadorn 29 - tout an devezh / Yezhoù ha Sevenadur e Sant-Ervlan : STAJ Brezhoneg

Staj evit an holl liveoù e-pad an devezh & koan evit an holl.

D'ar Sul 30 - 2e enderv / Skol Diwan e Sant-Nazer : Stal C'HOARIOÙ-TAOL e brezhoneg

A-hed ar miz / facebook brezhonegevitavugale : Ur ger bemdez



Samedi 1er - 15h-17h / École Diwan de Saint-Nazaire : Atelier de CROCHET en breton
Atelier pour crocheter et apprendre le vocabulaire en breton. À chacun d'amener son matériel.

Samedi 1er - 18h / Opéra Graslin Nantes : OPÉRA "La falaise des lendemains"
Opéra de Jean Lacomerie & Jean-Charles Richard en français, anglais et breton / surtitré en français.

Mardi 4 - 20h / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : GOULOÙ ZO : Histoire de la langue bretonne en Loire-Atlantique
Conférence en breton avec Anton Chatelier et Visant Roue / traduction en français.

Mercredi 5 - 10h-11h / Médiathèque de Guérande : LECTURE en breton pour enfants de 2 à 6 ans
Lecture d'albums en breton. Jusqu'à 25 enfants et accompagnants.

Vendredi 7 - 19h30 / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : ÉMISSION DE RADIO par Radio Naoned
Émission en breton et en direct pour célébrer la journée internationale des droits des femmes / traduction en français.

Samedi 8 - 10h-12h30 / Saint-Herblain, Orvault, Nantes, Saint-Nazaire, Guérande : Portes ouvertes des ÉCOLES DIWAN

Samedi 8 - 10h-12h / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : Présentation de PATATI
Réunion publique pour présenter de l'association Patati, centre de loisirs en breton.

Samedi 8 - 15h-18h / École Diwan de Saint-Nazaire : Atelier COUTURE en breton
Atelier pour coudre et apprendre le vocabulaire en breton. À chacun d'amener son matériel.

Mardi 11 - 20h / Café Game Over à Nantes : Fentlinenn 2, soirée JEUX VIDÉO en breton
Une soirée jeux vidéo diffusée sur Twitch, avec un programme sur-mesure, avec retransmission et participation à distance...

Mercredi 12 - 20h / Centre Culturel St Pierre à la Turballe : Atelier CHANT en breton

Mercredi 12 - 20h / Café Lutin de travers à Nantes : INITIATION au breton et au gallo
Rencontre pour faire connaissance avec deux langues du pays nantais en buvant un verre ensemble.

Vendredi 14 - 10h-16h / Radio Naoned / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : VERNISSAGE du studio Enroll

Samedi 15 - 14h / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : EUROFONIK : Conférence sur les plus vieux enregistrements en langue bretonne avec Tudi Créquer
Une conférence en français pour tous suivie d'un échange entre bretonnant.e.s pour analyser les enregistrements.

Samedi 15 - 15h / Salle de la fontaine à Assérac : MÉTAL NOZ
Concert de métal avec 8 groupes des 5 départements, et parmi eux Tanork.

Dimanche 16 - 17h / Salle de la fontaine à Assérac : FEST DEIZ
Concert avec Little Big Noz, Hent Douar, Trio Alcon, Kerent Trouzus. Danse avec le groupe An Tour Iliz.

Mardi 18 - 20h / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : GOULOÙ ZO : Concert Amelik & Mouss

Mercredi 19 - 15h / Le Plan B à la Turballe : Atelier JEUX DE SOCIÉTÉ en breton

Vendredi 21 - 20h / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : TROUZ ZO HA BISTRO

Pour sonner, danser et parler en breton.

Samedi 22 - 9h-11h15 / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : Atelier MUSIQUE pour les enfants

Samedi 22 - 9h / École Diwan à Saint-Nazaire : STAGE de breton

Mardi 25 - 20h / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : GOULOÛ ZO : Grande soirée du gallo

Vendredi 28 - 16h40 / Collège Diwan de Loire-Atlantique à Saint-Herblain : Portes ouvertes du Collège

Vendredi 28 - 20h / Onyx à Saint-Herblain : PIÈCE DE THÉÂTRE “Nos voies lactées“

Théâtre en français, en breton et en langue des signes.

Samedi 29 - 15h / Le Plan B à La Turballe : Atelier CUISINE en breton

Samedi 29 - toute la journée / Yezhoù ha Sevenadur à Saint-Herblain : STAGE de breton

Stage pour tous les niveaux pendant la journée et repas le soir ouvert à tous.

Dimanche 30 - 14h / École Diwan à Saint-Nazaire : Atelier JEUX DE SOCIÉTÉ en breton

Tout au long du mois / facebook brezhonegeuitarvugale : Un jour, un mot

Sonadegoù / Concerts

Sioul e vo miz C’hwevrer evit mirout startijenn hag energiezh e miz Meurzh. Ouzhpenn Mizvezh ar brezhoneg e vo aozet asambles gant Violoñdañs div abadenn sonerezh.

Le mois de février sera calme pour réserver toute son énergie au mois de mars. Outre le mois du breton, nous co-organiserons avec Violoñdañs deux événements musicaux à ne pas manquer.

Da gentañ, d'ar 1añ a viz Meurzh : ur fest-noz a vo aozet evit lidañ **embannadur ar bladenn Hip Noz**. Fred Bouley ha Gwen Kivijer a bedo an daouadoù Pennec-Leroy, Poulossier-Blain, Geffroy-Roué hag ar strollad Litha. Ar fest-noz a vo dalc'het e-tal hor C'hreizenn, e sal CSC Erv Breizh.

D'abord, le 1er mars : un fest-noz pour fêter la **sortie de l'album de Hip Noz**. Fred Bouley et Gwen Kivijer ont invité ce soir-là, les duos Pennec-Leroy, Poulossier-Blain, Geffroy-Roué et le groupe Litha. Le Fest-noz aura lieu en face de notre Centre, dans la salle du CSC du Sillon de Bretagne.

FEST-NOZ
sam 01 mars 2025
Saint-Herblain

✦

dès 20 h :
apéro-crêpes session musique irlandaise

de 21 h à minuit :

HIP-NOZ
sortie d'album !
Fred Bouley & Gwen Kivijer

Pennec - Leroy
LITHA
Poulossier - Blain
Geffroy - Roue

Salle du CSC du Sillon de Bretagne
12 bis av. des Thébaudières
org : Violondañs & Yezhoù ha Sevenadur - 6 €

Hag an 12 a viz Meurzh dalc'hmat e sal CSC Erv Breizh e vimp laouen o tegemer ar strollad **Celtic Fiddle Festival** evit ur sonadeg etrekeltiek gant ar broioù Iwerzhon, Skos ha Saozneg. Plijadur a vo. Sur ha n'eo ket marteze.

Et le 12 mars, toujours dans la salle du CSC du Sillon de Bretagne, nous aurons le plaisir de recevoir le groupe **Celtic Fiddle Festival** pour un concert interceltique où Ireland, Scotland and Brittany se rencontrent ! de l'énergie en perspective.



Celtic Fiddle Festival

PROGRAMM 2025

Adkavit programm hon darvoudoù
etre MIZ GENVER HA MIZ EVEN

Retrouvez le programme de nos
événements pour les mois de JANVIER
À JUIN

KLIC



Ken ar miz a zeu...

Yezhoù ha Sevenadur

Centre Culturel Breton de Saint-Herblain

12 bali an Añjevinier 44800 Sant-Ervlan

12 avenue de l'Angevinière, 44800 Saint-Herblain

Cet email a été envoyé à {{contact.EMAIL}}

Vous l'avez reçu car vous êtes inscrit à notre newsletter.

[Se désinscrire](#)

